

— 4 —

ha qerqent ha ma vezo digoret souscriptionou pe grêt qestou en hor brô evit an dud maleürus-se, redomp da zeposi hon offranç, hervez hor moyen.

Un dever qer douç eo sicour an dud maleürus !

FIN.

INVOCATION

EN INTERÈST AN DUD MALEURUS

Revinet gant an doureyer bras.

Doue a visericord ! demeus a lein an ês
Sellit gant compassion demeus ho pugale,
Reduet d'an oll vizer, en disesper, sivoas,
Dre'r maleuriou êruet dre ar glaoeyer bras.

Oh ! pebes niver a dud a veler a bep tu,
Hep boued, collet gante oll, hac hep nep seurt repu !
Grit antren an esperanç ebars o c'halonou,
Ha scuillit ho madelez varneze, va Autrou !

Pedi a reomp ive ho Mab divin Jesus,
Da rentan oll gristenien ar muia generus
En andret ar victimou demeus an doureyer,
Zo rentet hirio an deiz en horrupla mizer.

O Mari ! Güerc'hez santel, Protectourez ar Franç,
Laqit hoc'h oll bugale da zigaç o offranç
Da soulaji o breudeur rentet qer maleürus
Dre ravach an doureyer horrupl ha spouronus.

Mes ni dreist oll, Bretonet, atao güir gristenien,
En em hastomp d'o zicour en o c'her bras anqen :
Doue a lavar deomp soulaji hor breudeur
P'en em gavont reduet d'ar glac'har, d'ar maleur.

An anter eus ar pezh a vezo güerzet demeus ar Recit-mä, a vezo en profit victimou an doureyer bras.

A.-L.-M. L.

A. Lédan

E Montroulez, e ty LÉDAN, e traon ru ar Vur.